


imbourenh



Niverenn 57

31 Here 1974

IMBOURCH, KE LAOUENN BOLITIKEL

Pempvet bloavezh

Niverenn 57

30 Here 1974

Tri zalbenn ar stourm evit ar yezh. III. Kelennadur ar yezh er skolioù kefridiel.....	p.289
Keleier eus ar broioù keltiek.....	p.297
Petra a soñj Saunders Lewis eus an dilennadegoù.....	p.300
Prederiadennoù e ser ar prederour Stirner, gant Yec'han-Dominig Olier.....	p.303
Iliz ha politikerezh e Breizh.....	p.313
Diskeladegoù an hañv e Breizh.....	p.315
Ar "C'hendalc'h etrekeltiek" en Naoned.....	p.317
Hol lennerion a skriv.....	p.322
Diskouezadegoù an hañv.....	p.323
Lizhiri : doareoù "Englev an Tiegezhioù".....	p.324

=====
Koumanant-bloaz : 30 lur. K.R.P. Y. Ollivier. 1 534 25 Roazhon.
Deraoufiñ a ra ar c'houmanant-bloaz e miz Genver.

Priz an niverenn-mañ : 5 lur.

Ar pennadoù a zo da gas da : Y. Ollivier, 7 bd. A.-Burloud,
35 000 Roazhon.
CPPP 30 015

T R I Z A L B E N N A R S T O U R M E V I T

A R Y E Z H :

I I I. k e l e n n a d u r a r y e z h e r s k o l i o ù
k e f r i d i e l

E-pad ur mare ez eo bet ar c'hiz en Emsav embann ne dalveze kelennerzh ar yezh un dra bennak nemet urzhiet e vije gant an Emsav ha dindan e atebegzh, hep darempred ebet gant ar Stad c'hall. En difetis e oa reizh ur seurt gweladur eus an traoù hogen diazezet e oa war ur meizad faoz eus ar framm stadel broadel a oa da sevel. Goulakaat a rae ar meizad-se e oa tu da amsaviñ ar framm stadel gall gant ur framm prevez brezhon, ha kement-se er-maez eus pep argerzhad dispac'hel dialuskat ha kevadeg hag, a-benn ar fin, dibourvez a bep galloud politikel. Gant ur seurt damkaniezh e oa lezet a-gostez hag er-maez eus ar gont kalvezelezh ar framm stadel a ro tu d'ur gevredigezh arnevez da vont en-dro. Ar Stad, hiziv, ne stumm ket hepken hor speredoù dre ar c'helennerzh kefridiel, lakaomp, - pezh a zisoñjomp peurvuañ, hogen pourchas a ra da bep hini e araezioù bevañ : ar c'hehenterzh, an tredan, an dour, ar gremm h.a. (ha ma ne raje ket war-eeun e raje dre hanterouriezh embregerezhioù ramzel a vefe lodek e galloud ar Stad ; led-stadel eo kement embregerezh he deus tizhet ment ur vroad tud.) Fellout a ra deomp merkañ, dre se, e tibenn buhez pep hini diouzh un hollad kevredigezhel a ya kalz en tu-hont d'ar barrez pe zoken d'ur rannvro bennak. Diboell ha lu e vefe, eta, d'an emsav klask erlec'hiañ ul led-framm diefedus ha dic'halloud ouzh an hini a zo reolet gant ar Stad hiziv.

Goude ma raje berzh mui pe vui ur seurt raktres ne zisoc'hje nemet da serriñ an Emsav en ur geto ha dañjer ar "geto" eo, dres, lakaat ur stroll da zilezel pep mennad dispac'hel e par ar gevredigezh hollel.

Diouzh un tu all hon eus displeget er pennadoù hon eus gouestlet da S.A.E. ha d'ar c'hreizennoù kelenn ez eus bet klasket diazezañ en-dro da Roazhon pegen amsteriek ha diefedus - evit pezh a zo eus degas stourmerion nevez d'an Emsav - ez eo ar c'helenn yezh prevez goude ma vije aozet gant emsaverion. Gwir eo n'en deus ket padet gwall bell an arnod-mañ hogen gwiriañ a ranker n'eur ket deuet a-benn c'hoazh er c'hreizennoù-se da beurzeskiñ ar yezh na da lakaat ar stourmerion da gemer perzh e labour an Emsav. Moarvat ez eo arabat teurel ar billig war-lerc'h an trebez hogen aner e vefe kontañ re war efedusted ar c'helenn yezh evit stummañ emsaverion drezañ e unan. Se, a-hend-all, hon eus diogelet alies.

Moarvat e c'hell ar c'helenn yezh prevez kaout da amkan e-touez re all suraat ur vezañs bennak eus an Emsav e-touez ar boblañs e kement lec'h maz eus tu hogen ma ned, a ket ar stourmerion en tu-hont d'an amkan-se e vint war var da ren un emgann arouezennel ha stultennek, hep ster na poell ebet, ha da wastañ o buhez evit un albac'henn. Setu, kefridi an Emsaver n'eo ket kelenn ar yezh evit kelenn ar yezh gant ar spi e tiwano un emskiant bobl virvidik diwar ar c'helennerezh-se hogen tregemm ar sevenadur armerzhelour impalaerelour a vremañ evit erlec'hiañ outañ ur sevenadur denel ha speredel gwirion, war-bouez en em harpañ, e Breizh, war ar vroadelezh hag ar yezh a bourchas un arm a-enep d'ar varbariezh nevez a zo krog d'en em ledañ abaoe deroù ar reverzhi c'hreantel lusket gant ar vourc'hiziezh danvezelour e dibenn an XVIIIvet kantved.

Daou amkan kenstur en deus an Emsav eta: derc'hel en he sav e Breizh ur gumuniezh politikel a zere ouzh ar pal a fell dezhañ tizhout ; diouzh un tu all, krouiñ ur sevenadur nevez dre ar gumuniezh-se o tennañ he c'hempoell hag he dibarded eus implij ur yezh nevez a zo ar brezhoneg ; kefridi an emsav eo eta treuzfurmañ ar gevredigezh vreizhat a vremañ dre ul labour steuziañ a denn da hini an Iliz ergentaou (pezh na dalvez tamm ebet ez eo an Emsav un Iliz ; er-maez eus ar sakrelezh emañ he zachenn oberiañ).

Evit lavarout ar wirionez, an eil amkan-mañ a zo pal an Emsav hag a ro e ster dezhañ hogen gwiriañ mat a ranker n'eus tu ebet d'e ziraez hep bezañ miret da gentañ ar yezh hag ar vroadelezh (1).

(1) Mont a rin amañ gant un distro-prezeg. Utopek e c'hell hañvalout bezañ mennad ur stroll bihan da grouiñ ur sevenadur hep harp ebet, koulz lavaret, er gevredigezh hollel. Moarvat e kinnig darn en em skorañ war ar broleteriezh vrezhon hogen houmañ, evit ar poent, a zo bet gounezet d'ar gealiadurezh varksat ha na ro lec'h resis ebet d'ar c'humuniezhoù diazez. A-hend-all ez empleg ar gealiadurezh varksat ar feiz en "danvezelouriezh istorel" ha na vo ket degemeret, dre ret, gant an holl stourmerion gwitibunan. N'eus forzh penaos, hervez ma embann an damkanourion marksat-leninat, e tisoc'h politikerezh pleustrek ar galloudoù komunour da zidak-touriezh an unstrollad, a ziskarzh didruez an holl warourion pe, da vihanañ, na aotre dezho nemet krakvevañ ha dzeriañ. En ur seurt saviad politikel ne gavo an Emsav digor ebet nemet o sujañ strizh d'ar galloud a ren, ma teurvez hemañ e c'houzañv.

Petra dezastum eus kement-se nemet e rank ur stroll darbenn a-wechoù an utopegezh evit ur pennad, - utopegezh a dalvez "nec'lec'hegezh" - ma fell dezhañ c'hoari ur roll dispac'hel en anzer-da-zont. Hogen d'ar c'houlz-se zoken e rank en em urzhiañ e seurt doare ma c'hello enstummañ un deiz bennak ar gevredigezh hollel.

An dañjer hon eus meneget a zo hini ar geto enezenn-ha-repu. Hogen unan all a zo ez eo kouezhet ennañ al luskad brezhon penn-da-benn : nagennadur ar gevredigezh hollel gant stourmerion diatebek ha dizesk, a zoare gant ar re a gaver er stolloù liesseurt a bled gant an amvevad, a dag al lu ('gall'), tuad anarkour al led-emsav dre vras.

Moarvat en deus an tuad anarkour ur roll - nac'hus - da c'hoari hag a zo distrujañ ar stuziadur bevezelour 'bourc'hiz' - er ster istorel - dre zisleberañ tamm ha tamm an emskiant istorel gall e Breizh, o prientiñ dre se, ul lec'h d'un emskiant vrezhon nevez ha na vo ket tu heptañ da grouiñ ur sevenadur nevez en hor bro.

En emgann a zle daskorifiñ o emskiant vroadel da Vreizhiz avat, en deus ar stourm evit ar yezh ur garg pouezus da sammañ. Ne fell ket deomp lavarout, moarvat, e tevoud kelennadur ar yezh an emskiant vroadel drezañ e unan hogen, hepken, e laka da ziwanañ a nebeudoù ur metou a nevez yezherion ma c'hello an Emsav tuta en e greiz ar frammoù en deus ezhomm evit seveniñ e gefridi.

Sklaer eo avat n'eus nemet mererezh an deskadurezh stadel - e Breizh evel e Kembre - a c'hell urzhiañ en un doare efedus kelennerezh ar yezh er skolioù. Pet eo eta darboellañ ar mererezh-se da zigeriñ d'ar yezh n'eo ket hepken an eil derez hag an trede hogen ivez ha dreist-holl ar c'hentañ a zo bet serret ouzh ar brezhoneg abaoe ar brezel.

Arguziñ a raio unan ez eo miret ur seurt stourmadeg d'al "led-emsav". Moarvat. Koulskoude e kav deomp ez eo ret da emsaverion zo adkregiñ ganti hiziv en ur reiñ dezhi ur spered nevez. Soñj hoc'h eus breutaerezh ar rannvroelourion a-raok ha goude ar brezel diwezhañ evit lakaat aotren ar yezh er skolioù kefridiel: ret e oa, a zaelent, aesaat kelennerezh ar galleg dre implij ar brezhoneg (unyezherion vrezhonek e oa c'hoazh un darn vat eus ar vugale a errue er skol) ; ar yezh, a-hend-all, a zlee bezañ miret hepken da blouezidi Gornog ar vro h.a. An arguzennoù arveret a denne, dre vras, da virout ur stuzegezh hag ur rannyezh henvoazel en ur boblañs e oa mall warni en em zizober diouto - dre ma virent outo a zont tre er bed greantel arnevez a hañvale dezho bezañ un doare baradoz.

Ar stourmadeg da brientiñ gant an Emsav ne c'hell kaout ur ster emsavel nemet diouzh ma vo meizet diouzh ur savboent broadelour. Arabat eo deomp en em douellañ : n'eo ket dre ma vo kelennet ar yezh e skolioù ar c'hentañ derez e stago ar gerent diwar ar maez da gomz brezhoneg adarre ouzh o bugale pe etrezo m'o deus dilezet ar yezh a-ziagent. Un devoud a zo bet diskuliet deomp er C'hendalc'h keltiek en Naoned a zle hol

lakaat da brederiañ : n'eus ket estreget 10.000 krouadur o c'houzout kembraeg a vihanik o tegouezhout er skol ; ha padal n'eo ket dic'hoanag a-grenn stad ar c'hembraeg p'he c'heñverier ouzh hini ar brezhoneg: pinvidik ha birvidik, peurgent, eo buhez kefredel kembraek Kembre. Ret eo krediñ eta ez eus nevez-kembraegerion eus an holl re a gemer perzh er vuhez kefredel-se (kemendall, emichañs, a zo ken gwir all en Iwerzhon),, evel e Breizh, nemet e vijent bet savet en un tiegezh emsaverion, egiz e Breizh adarre. Ur seurt saviad a ziskouezfe a-walc'h ne vez mui miret ar yezh nemet gant ar re he c'homz a youl gaer.

Ar pezh a fell deomp dastum eus kement hon eus displeget eo an dra-mañ : maz eus ur stourm da ren evit digeriñ dor ar skolioù kefridiel gall da vat d'ar brezhoneg ne c'hell ket ar stourm-se bezañ kaset en-dro gant an hevelep spered ha diwar an hevelep arbennoù hag an hini a zo bet renet gant ar vroadelourion ergentaou.

Diouzh un tu e tle an emgann-mañ bezañ urzhiet gant broadelourion hag e sell d'an Emsav ; n'eo ket avat e sell d'ur viridigezh vojennel eus ar yezh war ar maez. Dav eo d'ar re a ren ar stourm-se soñjal, da gentañ, er vugale a savont o unan e brezhoneg a vije serret en ur geto ma n'he dije o yezh lec'h kefridiel ebet er reizhiad kelenn gall a vremañ. Anat eo, a-hend-all, n'eus nemet an Emsaverion a gemer deur da vat er yezh ha ne ra hini all ebet nemet perzhiek e ve en Emsav e stumm pe stumm pe douget dezhañ.

Diouzh un tu all , evel m'hon eus merket, ne c'heller mui goulenn kelennerezh ar yezh er skolioù diwar arbennoù a ziorroadurezh ; ar vugale a oar c'hoazh ar brezhoneg e goueled ar vro a zo, an darn-vuiañ anezho, divyezherion adal o bugaleerezh kentañ, savet e galleg gant o c'herent ha tapet ar yezh ganto diwar zaremprediñ o zud kozh. Dav eo eta stagañ kelennerezh ar yezh ouzh tonkad ar vro hec'h unan en ur lezel a-gostez an arguzennoù trivliadel a oa implijet

betek hiziv, diouzh ar rannvroelourion eus deroù ar c'hantved, "ar brezhoneg, yezh an tadoù kozh" e Breizh-Izel h.a. Re ez eus bet pouezet, war hor meno, war an elfenn santimantel-se gant ar soñj fazius e oa fromet ganto Breizhizeliz.

E gwirionez n'en deus ar brezhoneg ur chañs bennak da zrestivevañ nemet ma kresk er vro tamm ha tamm un emskiant bobl nevez penn-da-benn da Vreizh. An emskiant bobl-se a zo o tiwanañ, moarvat, hogen awenet eo dreist-holl gant arbennoù armerzhel pe un drivliadelezh werinek digalon. Dre se ez eo ret diskouez da bobl Vreizh ez eo kenstag an emskiant bobl nevez-se he deus lakaet Breizhiz da gemer meur gant o lazoù, ouzh diorreadur ur sevenadur a ziforc'h diazezet war ar yezh. seul vuioc'h e vo emouez ar Vrezhoneg ouzh o dibarelezh, seul vuioc'h ez akedint difenn o c'henvad a bobl.

N'eo ket eta an arguzennoù trivliadel hon eus meneget endev - ar brezhoneg yezh an tadoù kozh, yezh ar werin, yezh ar geizh ha me ' oar-me - ez eo ret arverañ ; ar seurt arguzennoù, er c'hontrol, ne c'hellont nemet pellaat diouzh ar stourm sevenadurel ur werin he deus kas ouzh he faourentez, he zavan-tegezh, he gwerinelezh, dres. Dleet eo, er c'hontrol, stagañ ar stourm evit ar yezh ouzh ar stourm politikel hag armerzhel hep e eren strizh ouzh ur strollad politikel bennak hag o tiwall bepred da ziskouez e rank ar brezhoneg bezañ benveg ur gevredigezh vrezhon klck ha diorreet ha n'eo ket hini ur c'hendere hepken a gouerion eus goueled ar vro.

Kement-se a zle bezañ lakaet e gwel dirak ar bobl dre levrioù bihan, traktoù, kazetennoù e-kerzh bodadegoù, abadennoù brudañ liesseurt evel "Gouel ar brezhoneg" h.a. Houmañ a c'hell bezañ kefridi ur stroll evel S.A.E., da skouer (1).

Evit tizhout an amkan-se e ranker mont gant daou hent. Da gentañ an darempred gant ar bobl dre hanterouriezh ar pennadurezhioù lec'hel, maered ha kuzulierion bastell-vro.

Fleustret e o bet an hent-se meur a wech a-ziagent hogen

(1) N'eo ket ur "Gouel ar brezhoneg" ur wech ar bloaz evit Breizh a-bezh a rankfe bezañ aozet hogen dek pe ugent a-hed ar bloaz e pep korn eus ar vro ha pa ne ve nemet e ser ar "festoù noz".

kement-se ne dalv ket e tleer e zilezel hiziv, - e lec'hiañ e rez ar stourm sevenadurel broadel, ne lavaran ket. Krediñ a ran, peurgent, ne vefe ket un dra fall loc'hañ adarre gant ur stourmadeg a seurt gant hini "Ar brezhoneg er skol" etre an daou vrezel pa voe lakaet ar c'huzulioù-parrez da vouezhiañ mennadoù a-du gant kelennadur ar yezh er skolioù, nemet, eveljust, e rankfe atebion ar stourmadeg nevez-mañ ober gant arguz-ennoù disheñvel diouzh re oberourion "Ar brezhoneg er skol" o vezañ m'eo disheñvel ivez saviad ar yezh hiziv. Se a rankomp adlavarout bep taol.

Moarvat e vefe ret tremen dre ar gannaded evit pouezañ war ar mererezh ha lakaat mouezhiañ lezennoù a-du gant kelennerezh ar yezh en holl zerezioù ar reizhiad-kelenn gall.

Un aozadur hepken ne vo ket gouest da gas ur seurt steuñv da benn. Ret e vefe eta da veur a gevredad - zoken strolladoù politikel - en em glevout evit labourat a-gevret. Me 'oar ez eo diaes tizhout hevelep unvaniezh war dachenn an 'emsav' er mare-mañ. O vezañ ma anad evelkent un doare kedveno - e sigur ar sokialouriezh, da skouer, peogwir emañ "Strollad ar Vro" diwar vremañ a-du gant ar sokialouriezh - e-touez an darn vrasañ eus ar Strolladoù brogar a fell dezho tapout evit Breizh lod eus he gwirioù, da vihanañ, ne zlefe ket bezañ dic'hallus bodañ an holl stourmerion vrezhon en un talbenn a gemerfe da bal gounit un nebeut trec'hioù resis en emgann evit ar yezh.

Ne gav ket din eta e virfe an diforc'hoù war dachenn ar politikerezh ouzh perzhidi an talbenn a genoberiañ. Pezh a c'hellfe herzel ouzh ar c'henlabour avat e vefe un dizemglev diwar-benn ster an emgann a vefe da ren. Da geñver bodadeg Pondivi e oa anadet un emdroadur eus kedveno al luskad brezhon yezhelour hag a ziskoueze e oa darev an izili anezhañ, diwar neuze, da gompren gwelloc'h gwir saviad ar yezh ha da spiswelout an amkanioù a oa da dizhout ma venner reiñ d'ar yezh ur chañs

bennak da zrestvevañ. An tuadur-se a rankfe bezañ kadarnaet evit ma c'hellfe an talbenn kaout un diazez start d'e ober.

+++++

Evit echuiñ e kounimp eta an amkanioù e rank bukaf outo un talbenn evit ar yezh ma fell dezhañ oberiañ en un doare efedus :

1) lakaat pobl Vreizh da veizañ mat saviad gwirion ar yezh er mare-mañ ; un emgann ne c'hell ket bezañ renet gant sorc'henoù hag huñvreoù ;

2) diskouez dezhi he deus un dibab istorel da ober - pe virout ha diorren ar yezh oc'h ober anezhi he yezh vroadel - pe he lezel da vont da get ma ne fell ket dezhi degemer eviti tonkad^{er} ur vroad, hep skuilhañ diwar he fenn daeroù pilpouz ;

3) evit harpañ pobl Vreizh da ober he dibab e tlefe an emsav broadel diskouez dezhi ez eo he berzh-mat politikel hag armerzhel stag ouzh adsavidigezh ar vroadelezh diazezet war ar yezh ;

4) kement-se a c'houlaka e ve ar brezhoneg pennañ benveg eztaoliñ ar vuhez kefredel e Breizh hag e ve brezhonegerion eus ar stourmerion a bled gant an aferioù foran e Breizh (alese pouez an aozadurioù politikel brezhonek) ;

5) kelennadur ar yezh en holl zerezioù ar reizhiad kelenn kefridiel a vremañ ne c'hell ken kaout da amkan saveteiñ ar yezh war ar maez e Breizh-Izel ; kement-se ne c'hellfed tapout nemet war-bouez diazezañ ur c'helennerzh brezhonek unyezh er c'hentañ derez war ar maez e "Breizh-Izel" (1) ne c'hell kaout da bal nemet prientiñ ur metou brezhoneger desket a vo kraonell ur gevredigezh nevez-vrezhonek warc'hoazh.

(1) Penaos, hiziv, termeniñ bevennoù Breizh-Izel ? Penaos enklozañ enni pastelloù-bro bet gallekaet abaoe deroù ar c'hantved evel ledenez ar Wizh pe ar c'hêrioù hag ar bourc'hioù ? A-hend-all, nag ar c'hedveno, evit c'hoazh, nag ar mererezh gall n'int prest c'hoazh da zegemer ur seurt kinnig er mare-mañ.

N'eus forzh penaos ez eo arabat disoñjal ne vefe ar stourmadeg-mañ nemet ur gammed ouzhpenn er strivadeg a zle adober eus Breizhiz ur vroad a-benn ar fin.

Y.O.

=====

KELEIER EUS AR BROIOU KELTIEK

NOTENN. Tro hor bo da gomz hep dale eus an dilennadegoù diwezhañ e Breizh-Veur. O c'hor-toz e roomp amañ un nebeut titouroù diwar-benn dilennadegoù miz c'hwevrer.

+++++

Dilennadegoù a zo bet dalc'het e Breizh-Veur d'ar yaou 28 a viz C'hwe er 1974 hag, e el ma ouzer, aet eo war-raok ar vroadelourion e Kembre ha, dreist-holl, en Alba. Ur pennad talvoudus tre a zo bet embannet gant Per Peneg diwar-benn an dilennadegoù-se e-barzh AL LIAMM, niv. 163, meurzh-Ebrel, paj. 167-171, hag embannet eo bet i ez an disoc'hoù dre ar munud war ar c'hannadig KENDALC'H KELTIEK, niv. 2, mae 1974.

A-raok an dilennadegoù-se ne chome nemet ur c'hannad broadelour e Bro-Skos, Donald J. Stewart, hag hini ebet e Kembre. Goude e voe 7 kannad broadelour skosat ha 2 gannad broadelour kembreat. Evit keñveriañ e c'heller merkañ na oa nemet 12 kannad gant ar Strollad frankizour breizhveurat, anezhañ trede strollad ar rouantelezh!

Gouzout a réer ivez pegen treut e oa diforc'h etre an daou strollad bras, strollad al Labour, hag ar strollad mirour. E gwirionez e oa ouzhpenn an hanter eus ar gannaded en eneberezh ha diaes eo bet d'an ao. Wilson gouarn war ar vro. Ouzhpenn-se ez a an traoù war washaat bemdez e Breizh-Veur ha war baouraat ez a mui-ouzh-mui an enezenn. Setu perak en deus divizet ar gouarnamant saoz aozañ dilennadegoù nevez e miz Here, eizh miz hepken goude an dilennadegoù diwezhañ ! Gwell a se evit ar vroadelourion, dreist-holl en Alba rak an tu o devo adarre da ziskouez o nerzh ha da vont war-raok en o stourm. Tu hor bo da embann an disoc'hoù ha da brederiañ warno. Setu bremañ un nebeut keleier diwar-benn an dilennadegoù diwezhañ.

Penaos eo bet dasparzhet ar mouezhiadoù d'an 28 a viz C'hwevrer

<u>A L B A</u>	1970	1974
DILENNOURION ENSKRIVET	3 629 017	3 666 325
MOUEZHIADOU EZTAOLET	2 688 235	2 886 653
DREGANTAD	74,1 %	78,7 %
DANVEZ-KANNADED	256	265
KANNADED DILENNET	71	71

STROLLAD BROADEL		STROLLAD AL LABOUR	
	1970	1974	
Mouezhiadoù	306 802	602 032	1 197 068
Dregantad	11,4 %	21,9 %	44,5 %
Danvez-kannaded	65	70	71
Kannaded	1	7	44

STROLLAD MIROUR		STROLLAD FRANKIZOUR		STROLLAD KOMUNOUR	
Mouezhiadoù	1020674	950901	147 667	229 099	11 408
Dregantad	38,9 %	32,9 %	5,5 %	7,9%	0,4 %
Danvez-kannaded	70	71	27	34	15
Kannaded	23	21	3	3	0

AR GANNADED BROADELOUR SKOSAT E WESTMINSTER

Rener : Donald Stewart
 Gremm ha tireoul : Gordon Wilson
 Aferioù diabarzh : Winifred Ewing
 Gounezerezh-douar, pesketaerezh, koadeier : Hamish Watt
 Deskadurezh, kudennoù an Uheldirioù (Highlands),
 kehenterezh : Iain MacCormick
 Annez, yec'hed, kevredigezh : George Reid

Abaoe miz Meurzh o deus bet ar gannaded skosat tri fal :
 - ur parlamant skosat dilennet gant holl skosiz, kiriek evit
 diorreadur armerzhel Alba, kudennoù ar pesketaerezh ha kudenn an tireoul
 skosat ;
 - ur poblaters ('referendon') diwar-benn Kenvarc'had Europa ;
 - stourm ouzh ar monc'hwezh dre skornañ ar feurmioù ha
 prizioù ar boued.

=====

E 1970 o doa kollet ar vroadelourien skosat 43 "deposit",
 pezh a oa ur bern arc'hant evit keñ ar strollad. E miz c'hwevrer
 n'o deus kollet nemet 6 "deposit" evit 70 danvez-kannad. Ouzhpenn ar
 seizh sez en deus kemeret ez eo erruet ar Strollad en eil renk e 16
 pastell-vro. Tenn e vo ar stourm enno e miz Here.

✓/+++++

AR RE YAOUANK ER VRO

GORDON WILSON, 35 vloaz e Dundee East
 Sellet e vez ouzh Gordon Wilson evel ouzh "empenn" ar
 Strollad Broadel, dreist-holl evit kement a sell ouzh kudenn an tireoul
 ha kdoniezh ar Strollad en he c'heñver.

Diskleriet en deus goude bezañ bet dilennet : "An tireoul
 a zo da Vro-Skos ha biken ne vo graet un treuzvarc'had war an dra-se."
 Un den a lezenn eo dre vicher.

Douglas Henderson, 38 vloaz, en "East Aberdeeshire"
 War e vicher ez eo "management consultant", da lavarout eo
 "kuzulier evit mererezh an embregerezhioù". Ur broadelour birvidik ez eo
 abaoe an oad krenn. Pellout a ra dezhañ difenn pesketaerezh Bro-Skoz
 hag enebet krenn ez eo ouzh ar c'henvarc'had.

Winifred Ewing, 44 bloaz, e Moray and Nairn
 Ar vaouez entanet-se a zo bet kannadez dija en Hamilton,
 e bannlev Glasgow, eus 1967 da 1970. Ar wech-mañ he deus trec'het
 Gordon Campbell a oa bet sekretour-stad evit Bro-Skoz er gouarnamant
 diwezhañ.

George Reid, 34 bloaz, e "Clackmannan and East Stirlingshire"
 War e vicher ez eo George Reid ur c'helaouenner ha displeger
 er skinwel. Abape bloaz hepken en deus emezelet er Strollad broadel.

Iain MacCormick, 34 Bloaz, en Argyll
 Iain Mac Cormick a zo kelenner war an istor e LIse Oban.
 E dad, John Mac Cormick, a voe unan eus diazezerion ar Strollad broadel.
 Fellout a ra dezhañ stourm dreist-holl evit degas labouradegoù en Argyll
 hag Oban ha mirout ar re yaouank er vro.

Hamish Watt, 48 vloaz, e Banff
 Mirour eo ar c'hannad broadelour-mañ. En em ginniget en doa
 gwechall evel danvez-kannad ar strollad mirour. War e vichez ez eo
 ul labourer-douar o sevel saout ha deñved.

Donald Stewart, 52 vloaz, en Inizi ar C'hornog ("Western Isles")
 Kannad broadelour ez eo abaoe 1970 pa gemeras ar sez digant
 Stollad al Labour gant 726 mouezh ouzhpenn. Ar wech kentañ e oa ma oa
 dilennet ur broadelour en un dilennadeg hollet. En taol-mañ en deus bet
 war-dro 7000 mouezhiad muic'h eget paotr al Labour. Mirour eo Donald
 Stewart a demz-spered. Fellout a ra dezhañ troc'hañ al liammoù a zo
 etre Alba ha Bro-Saoz rak Bro-Saoz a zo evitañ ur vro displeberet o vont
 da get.

=====

Disoc'hoù an dilennadegoù e Kembre

	1970	1974
DILENNOURION ENSKRIVET	1 958 778	1 997 571
DILENNOURION ENSKRIVET	1 516 554	1 593 833
MOUEZHIADOU EZTAOLET	77,4 %	79,8 %
DREGANTAD	138	148
DANVEZ-KANNADED	36	36
KANNADED DILENNET		

	Plaid Cymru		Strollad al Labour	
	1970	1974	1970	1974
Mouezhiadoù	175 016	171 364	781 941	745 547
Dregantad	11,5 %	10,7 %	51,6 %	46,8 %
Danvez-kannaded	36	36	36	36
Kannaded	0	2	27	24

	Strollad mirour		Strollad frankizour		strollad komunour	
	1970	1974	1970	1974	1970	1974
Mouezhiadoù	419 884	412 535	103 747	255 423	6 459	4 293
Dregantad	27,7 %	25,9 %	6,8 %	16 %	0,4 %	0,3 %
Danvez-kannaded	36	36	19	31	8	6
Kannaded	7	8	1	2	0	0

/.....

PIV A ZO BET DILENNET ?

Dafydd Wigley, 30 vloaz, e Caernarfon, anezhañ un armerzhour a vicher ha bez-kadoriad ar Strollad broadel. Brudet eo Dafydd Wigley evel ur politikour ampart, dezhañ, kentoc'h, mennoziou eus an tu-kleiz. Kembraeger eo.

Dafydd Thomas, 27 vloaz, e Meirionnydd. War e vicher ez eo Dafydd Thomas skoazeller er Skol-Veur gembraek. E-barzh "Plaid Cymru" ez eo atebek eus kudennoù ar gouneze rezh-douar hag an endro. Anavezet eo ivez evit e vennoziou eus an tu-kleiz. Kembraeger eo.

+++++

PETRA A SONJ SAUNDERS LEWIS EUS AN DILENNADECOU DIWEZHAÑ-MAÑ ?

Daoust d'ar pezh a c'hellfed krediñ n'eo ket bet Saunders Lewis ken lacuen ha trefanmet hag ar vroadelourion all gant trec'h an daou gannañ broadelour, daoust maz eo-eñ bet unan eus diazezerion ar Strollad Broadel e 1925. Ur perzh-mat hepken a wel en disoc'h-se : "Mirout a raio ouzh Kembre a vont gant an diaoul..."

Diaes eo a-wechoù kompren an den kozh-se (80 loaz en deus bremañ) a vev en e gorn abaoe pell, en distro diouzh buhez ar bed. Derc'hel a ra koulskoude da grouiñ ha da sevel pezhioù-c'hoari ha barnskridoù lennegel. Lemm eo bepred e bluenn...

"Ur ger divalav tre eo ar ger "broadelouriezh" rak mesket eo gant traoù spontus evel HITLER pe MUSSOLINI. E gwirionez n'eo ket ar vroadelouriezh kembreat evel-se tamm ebet. En he stumm gwirion e tennfe kentoc'h d'ur feiz evel ar feiz kravezel. Ul lusk eo er bobl kembreat evit ma adkavo he fiziañs emni hec'h unnan.

Tud zo a soñjo ez eo un doare strizh da welout an traoù. Evito ne c'hell ket ar vroadelouriezh bezañ sevenadurel pe speredel hepken. Diazezet e rank bezañ war arguzennoù armerzhel ha kevredigezhel fetis."

Hemañ n'eo ket ali Saunders Lewis. Hervezañ n'eo ket bet kresket niver mouezhiadoù PLAID CYMRU dre ma kreske evit gwir an emskiant vroadel. Er c'hontrol ez eo bet lezet a-gostez ar vroadelouriezh evit implijout arguzennoù armerzhel. Saunders Lewis a zo krenn a-enep al lugan arveret da vare an dilennadegoù : "Rich Welsh or poor English" ("Kembread pinvidik pe Saoz paour")

"Evit broadelourion wirion e teu an emzoujañs a-raok kement buzad armerzhel zo. Setu perak ez eo ken pouezus stourm "Cymdeithas yr iaith" e buhez ar vro hiziv rak ne bouez ket hepken war an arguzennoù armerzhel.

Kalz gwelloc'h eo, d'am soñj, an traoù en hanternoz Kembre eget er c'hreisteiz. Kavout a reer e-touez tud an hanternoz un emskiant don e vefe koll ar vroadelezh hag ar yezh kement ha lemel digant ar vuhez ar pezh a ra he zalvoudegezh wirion. N'eus nemet ur bihanniver eus gwerin diwriziennet ar c'hreisteiz evit meizañ mat an dra-se.

Ul labour mat a ra PLAID CYMRU ma vir ouzh an traoù a vont war washaat pelloc'h e buhez ar vro. Me 'gav din ez eo deuet a-benn e gwirionez da herzel ouzh an emdroadur-se. Hiziv e santer mui-ouzh-mui emañ Kembreiz o klask saveteiñ o sevenadur a oa o vont da goll.

Kembre a zo hepken ur c'horn eus ar gristeniezh, ur c'horn eus Europa, e-lec'h m'emañ ar sevenadur o tisleberañ hag o vont da get evel er peurrest eus Europa. Keuz bras am eus ez eo eus bet breutaet diwar-benn kudenn ar stagidigezh ouzh Europa hepken diouzh ur savboent armerzhel. Ma fell d'an dud ur sevenadur voutin gant un unaniezh politikel kentoc'h eget armerzhele vefe kement-se ur gammed wirion war-raok...Betek henn o deus broioù Europa pledet gant kudennoù armerzhel evel hini an tireoul en un doare a ziskouez mat ne glaskont nemet korvoù armerzhel...

Daelañ a raio ar vroadelourion ouzhin dre ma lavaran ez eo dic'hoanag ur vroadelouriezh hep brientinelezh. E-pad 500 vloaz n'he deus bet Kembre brientinelezh ebet. Bremañ e klask adkrouiñ unan nevez diazezet war ar varregezh. hag ar spered a atebegzh. Arabat sellout ouzh ar vrientinelezh evel ouzh un enebour. Pep bro he deus ezomm kaout unan, ha ma n'he deus hini ebet e tle sevel unan. N'on ket digalonekaet na malkoniet o komz eis Kembre. Isor hor bro n'eo ket un arackaat, avat, a vare da vare hepken ez eo istor ur stourm evit mircut ouzh an traoù a washaat muioc'h. Amañ he deus ar vroadelouriezh kembreat ur roll a-bouez da c'hoari."

+++++

EVITT HARPAÑ "IMBOURC'H"

Kounañ a reomp d'hol lennerion hon eus digoret ur skodennadeg e sell da harpañ ar gelaouenn ha reiñ tu dezhi en ziorren.

Ar re a garfe kas ur skodenn a c'hell he c'has d'ar G.R.-mañ : Y. Ollivier, 2 656 30 A, o rezizañ ar mennad anezhi.

=====

Prederiadennoù e ser
ur prederour :
S T I R N E R



gant

§§§§

Yec'han-Dominig
O L I E R

§§§§§§§§



Lennet em eus darn eus skridoù Stirner. Evel m'em eus lennet Imbourc'h, da lavarout n'em eus komprenet mann ebet... pe dost. Ur prederour eo Stirner, ha muioc'h c'hoazh, ur prederour milliget. Piv a anavez Max Stirner? Ket gwall dud. Nag en tu dehou, nag en tu kleiz. Ret eo lavarout , pa vez an tu kleiz en tu dehou evel e bro Rusia, hag ivez e bro Sina, n'eo ket mat evit ar yec'hed bezañ añvet . Soljenitsin, Bakounin pe Stirner.

Max Stirner a zo añv-pluenn Johann Caspar Schmidt. Ganet eo d'an 25 a viz here 1806 e Bayreuth e bro Alamagn. Bet eo skoliad e lise Bayreuth etre 1818 ha 1826, ha resevet eo bet en e arnodenn dibenn studioù gant notennoù mat. Etre 1826 ha 1835, studiet en deus er skolioù veur e Berlin hag Erlangen, prederouriezh, yezhoniezh ha doueoniezh. E vistri a oa Hegel, Feuerbach, Lachmann ha Trendelenburg.

En e arnodenn, n'en doa ket Stirner notennoù uhel a-walc'h evit bezañ kelenner er skolioù-stad. Paour-tre eo Stirner. E dad a zo marv pa oa bihan-tre. E vamm, dimezet azou da vezañ sod. Diaes-tre eo ar vuhez evit Stirner. N'en deus ket bet yaouankiz alaouret Goethe pe Marx. Kavet en deus, a-benn ar fin, ur plas kelenner en

ur skol brevez evit merc'hed yaouank ha pinvidik.

Stirner en deus dimezet div wech. Marv eo e wreg kentañ o willoudiñ. Un droukverzh eo bet an eil dimeziñ gant Marie Dähnhardt.

Stirner a yeas e kelc'h berlinat "An dud dieub". Gwelet ez eus bet er c'helc'h-mañ entatud evel :Marx, Friedrich Engels, Bruno hag Edgar Bauer, Ludwig Bulh, Friedrich Sass, hag all... Met Stirner ne blije ket dezhañ an trouz, na farsadennoù ar studierion, ar re all. Chom a rae en e gorn hep lavarout gwall dra. Skrivet en deus pennadoù e "Kazetenn ar Roen", ar "Bellskriverezh", "Kazetenn hollek Leipzig", ar "gelaouenn vizek eus Bulh." "Faos pennaenn hon desavadurezh" en deus skrivet e 1842.

E 1844 eo ez eo embannet e levr talvoudusañ : "An unel hag e berzhioù piaouel. Diouzhtu eo bet berzet gant reolerezh ar skridoù. Evelkent e ro an ensellerien an aotre dezhañ da c'houde rak kavet o deus e oa al levr "re ziskiant evit bezañ danjerus". E vignoned a zo a-enep d'e venozioù hag a zilez anezhañ. Ar skol e-lec'h e laboure a serr he dorioù outañ. Klask a ra sevel un ti-laezh, met n'eo ket barrek war ar c'henwerzh, hag e koll an nebeut arc'hant a chome gantañ. E wreg a ya kuit e 1846. Div wech eo aet d'an toullbac'h evit dleoù e 1852 ha 1853. Mervel a ra ar 25 a viz mezheven 1856, oadet eus 49 vloaz hag 8 miz, dianavezet, e-unan hag en davantegezh.

"N'em eus diazezet va stourm war netra" eme Stirner e penn e levr. Ar frazenn-mañ a ziverr e vennoz. Dizoue eo. Ret eo neuze dezhañ distrujañ Doue e kement

lec'h ma chom. Reizh eo. Ret eo bevañ hag ober hervez hor mennoziou. Ma kredomp e Doue, ret eo bevañ gant Doue. Maz omp dizoue, ret eo distrujañ ennomp ar spe-red doueel ha pep relijion. Ha daoust ^{hag} an dra-se a zo graet? Nann! Doue 'zo e pep lec'h. Seul vuioe'h e vez distrujet, seul vuioe'h e vez adc'hanet en ur stumm all.

Sellomp ouzh ar gomunourion. Doue 'zo un opium, emezo. Mat! Met petra o deus graet goude bevañ lavaret ar frazenn vray-mañ. Savet o deus iouzhna ur relijion nevez. Marx 'zo an Doue meur. Pe, kentoc'h, an diouganer meur, un doare Mahomed. Rak Marks ivez en doa e zoue, e opium. Ar stad eo, Doue Marks. Ar relijion 'zo opium ar bobl, ar stadelezh a zo op um an aotrou Marks. Ar stad zo bras, ha Karl Marks a zo he diouganer. Ar stad ra vo meulet. Meulet ra vo ivez an doueed bihan all. Rak ur "pantheon" eo ar varksouriezh. Lenin a zo a gleiz d'an tad, ha Trotski a zehou. Stalin a zo o virout dorioù ar baradoz, evel Sant-Per. Met n'eo ket alc'houezioù a zo gantañ, met bilhedoù evit mont da Siberia. Ar baradoz a vo evit warc'hoazh. Mao a zo an doueig diwezhañ, ar gwidoc'hig, ar bugel spontus. Doueed all ar "Pantheon" komunour n'int ket ken fentus na ken brudet.

An dra-se a ziskouez deomp pegement en deus mab-den ezhomm eus Doue. Beleien veur ar relijion gomunour o deus lakaet pep tra da vezañ sakr: sakrelaet o deus ar penntiarned, sakrelaet ar Strollad, sakrelaet al lu, sakrelaet ar bobl (petra eo ar bobl), sakrelaet ar c'henderc'h Broadel Kriz.

Gwir eo. Ma kredomp e Doue, pep tra 'zo sakr rak pep tra 'zo graet gant Doue. Met ma nac'homp Doue, ret

eo distrujañ ar sakrelezh. Setu pezh a fell da Stirner.
Tud o deus nac'het Doue, met lakaet o deus mab-den da
vezañ un doue. Un doare Nieztchê gant e zreist
den. Nietzsche, hag eñ deut war-lec'h Stirner, hag evitañ
da vezañ lennet e skridoù, en deus miret c'hoazh ar
spered relijiel. Eñ kennebeut n'eo ket bet reizhpoell
e-keñver e vennoziou dizoue. Zaratoustra o tiskemndiouzh
ar menez, a-boan echuet gantañ lavarout e oa marv Doue,
en deus savet diouzhtu un doue all "buan hag aes!"
"Natur a euzh ouzh ar goulloer". Natur mab-den a euzh
ouzh goulloer Doue. Da ugent vloaz e skrive Nietzsche
ar varzhoneg mañ:

Ur wech c'hoazh a-raok kenderc'hel
gant va hent ha kas pelloc'h va sellou
e savan, en digenvez, va daouarn
war-du ennout ha da aspediñ a ran
te hag a nevetaas, ent lidel,
aoteriou e don donañ va c'halon
d'am lakaat, da bep eur,
da glevout da vouezh a-nevez.

Pemp bloaz warnugent goude, e fin e vuhez, ez adkaver
ur bedenn heñvel, nemet ez eo ankenietoc'h :

Nann! distro
gant da holl jahinoù,
war-du an hini diwezhañ eus an holl zigenveziou
O distro, distro!
va holl zaeroù, va holl zaeroù
a gouezh war-du ennout
ha flammenn diwezhañ va c'halon
a zev evidout!
Distro, distro!
Va Doue, va dianav, va foan, va diwezhañ eurvad!

An diforc'h etre ar Varksourion ha Nietzsche a c'hoarvez eus kement-mañ: ar varksourion o deus aozet un doue marv, "an hini yenañ eus an holl euzhviled yen"; ar stad. Ha gant ar stad evel just o deus miret an Urzhaz. An urzhaz-mañ a zo un urzhaz kazarn, gant chas ha fuzuilh-où evit en emziwall diouzh ar bobl. Urzhaz Nietzsche a zo un urzhaz kefredel. Ar pal n'eo ket kaout ar galloud, met diskouez d'an dud an hent mat, ma c'hell an dud e gavout. Hag all. Chom a raint en ur gevredigezh a-us d'ar re all, o nijal, "tchip, tchip" pell diouzh ar bobl.

Marks 'zo ul loen gouez; Nietzsche, avat, a zo ur barzh. Met an daou o deus lazhet Doue evit lakaat anezhañ da adc'heneel.

Stirner, avat, a zo ur barzh ivez, peogwir ez eo pep prederour ur barzh, Lazhet en deus Doue, met n'en deus ket adsavet unan all. Stirner, an hini eo . a zo reizhpoell e-keñver e vennozioù. Goude distrujidigezh Doue, n'en deus ket savet ur Stad, pe skrivet barzhonegoù; lavaret en deus e oa ret distrujañ ar sakrelezh. Rak er sakrelezh eo emañ Doue o chom c'hoazh en hor spered. O tistrujañ ar sakrelezh, e vo distrujet an holl zoueed a c'hell bezañ ganet diouzh hor spered, hor falta-zi, hon ezhomm eus an tad.

Evit pezh a sell ouzhin, kristen 'on ha padal o kavan talvoudus ha dudius kenañ pezh a lavar Stirner. Rak daoust ha gwir gristenien omp? Daoust ha n'emaomp ket war hon daoulin dirak doueed faos? Sonjit ! Jezuz Krist, en templ, a oa e fulor peogwir e oa bet lakaet ti Doue da vezañ ur marc'had. Peseurt doueed hon eus ni? Ma n'eo ket Marks, ez eus re all. Ar C'hallaoued o deus Napoleon (beuark), De Gaulle. Daoust ha kristen eo De Gaulle? Ar goulenn-se eo a rae

ur c'helaouener gall, n'ouzon mui e anv. Nann! a responte rak ne c'hellomp ket kaout daou Zoue, Doue hag ar stad. De Gaulle ne oa ket kristen; e relijion a oa Bro-G'hall. Lennit pezh a skrive De Gaulle. Spontus eo pegen pell e oa e vennoziou diouzh ar gwirvoud. Bro-C'hall a oa ur c'heal. Met ar bobl, al labourerien, ar re o deus poan da vevañ ? Lidlazhet e vint war aoter Bro-C'hall.

Hag ar Vretoned ? N'int ket sotoc'h eget ar re all; n'int ket speredekoc'h kennebeut. Daoust ha ne oa ket Breizh ur c'heal evit tud an Emsav kozh a vev en ur geto? Pell diouzh ar bobl, evit abegoù disheñvel diouzh re De Gaulle, gwir eo, met pell memestra; ur Vreizh evito o-unan o deus savet, ur Vreizh e-lec'h e oa mat en en gavout evel en un tiegezh serret, e-lec'h n'en dije mui tech an tagañ d'ober droug deomp. Ha tud an Emsav nevez? Ur bobl all eo o hini, met ur c'heal pell diouzh ar gwirvoud e chom. Ar bobl labourer, ar bobl kanmeulet a yelo d'ober ar brezel evit dieubiñ Breizh hag evit an Dispac'h. Ur bobl evel ma kavomp e levrioù an Dispac'h e Bro Rusia, pe e Bro Sina.

Relijionoù, relijionoù ! Pet relijion hon eus savet? Pet keal brav hon eus ijinet? Pet Doue nevez hon eus krouet?

Stirner a zesk deomp : Maz oc'h dizoue, distrujit, mar plij, pep tra 'zo doueel ennoc'h; distrujit relijion ar Stad; distrujit relijion ar bobl, relijion an Dispac'h; distrujit ar c'healioù meur : keal ar reizhded gant Proudhon, keal ar frankiz gant Bakounin, Ha Breizh? Petra eo Breizh? Netra. Un dra a dremenno. Mann ebet n'en deus ster ebet.

Petra a chom neuze? a c'houlennât. Stirner en deus lavaret : "War netra em eus savet va stourm". Nann, ne chom mui netra. Ma zoken, petra on? N'on ket un doue bihan. Piv en deus gallet lavarout e oa mab-den un doue. Paour kaezh doue bihan lu.

Ma n'eus Doue ebet, ster ebet n'he deus ar vuhez. Ha ne chom mui nemet un dra d'ober : en em lazhañ. Kement hini avat a lavar ez eo dizoue en deus feiz e gwirionez en un dra bennak: ar Stad, ar Bobl, pe n'eus forzh petra, ne vev ket hervez e vennoziou; lazhet en deus Doue, met miret en deus ar relijion; un Doue nevez en deus krouet.

Met, neuze, a c'houlennit, perak Stirner n'en deus ket en em lazhet? Va respont vo berr: n'ouzon ket. N'em eus ket gallet goulemoutañ peogwir e oa marv paz on bet ganet. Marteze peogwir n'en deus ket bet amzer, rak, gwir eo ivez, kement a labour a c'houlenn skrivañ ul levr evel en deus skrivet. Pe miret en deus ennañ un dra bihan sakr. N'eo ket "korn ar brezhoneg", met "korn ar sakr". Ne chom mui gwall dra, met dres a-walc'h da chom bev hep en em lazhañ. Pe kavet en deus e oa dija ken diaes bevañ, ma oa ret ouzhpenn mervel! Daoust ma kreder ar c'hontrol : seul vuioc'h eo diaes ar vuhez, seul aesoc'h eo mervel.

Deomp-ni, kristenion, e tesk Stirner lazhañ an holl zoueed bihan hon eus krouet; ar brizhkredennoù, an arc'hant, ar c'harr-tan, ar skinwel. Ret eo lakaat an danvez en e blas, da lavarout, an traoù a zo evit hor servijañ ha ket evit bezañ hor mestr. Rak piv 'zo ar mestr aze, ar c'harr-tan pe me, an arc'hant, ar galloud, an emgarantez pe me, den dieub dre va youl, dre

dre va c'halon, dre va ene, dre gelennadur Jezuz-Krist.

E gwirionez, pa sellan ouzh an dud ne welan na tud a feiz, na tud dizoue; ne welan nemet azeulerion-idoloù. Hag ar re-mañ, o deus idoloù heñvel: ar c'harr, ar skinwel, an arc'hant, ar galloud. Un doare oekumenegezh idolazeuler eo. Un nebeut a dud nemet ken a zo dizoue pe tud a feiz. Ha d'an hini a zo dizoue, n'eus nemet un dra d'ober : en em lazhañ. D'an hini a feiz, n'eus nemet un dra d'ober : bezañ manac'h. Reañ e vuhez evit Doue. Mont a-us da bep tra. A-us d'an danvez, a-us d'an arc'hant, a-us d'ar galloud, a-us da Vreizh ivez. Rak petra eo Breizh? Un dra a dremenno. Petra chomo diouzh Breizh goude mil kantved? Netra ! Hag ar brezhoneg, ar galleg, hag all... Netra ne chomo. Pep tra 'vo disheñvel, pep tra 'vo estren, evel maz eo estren Breizh gwechall, Keltia gwechall. Penaos ? a lavarit, pa lennan istor Breizh pe istor Keltia, va istor eo, ha n'on ket estren o lenn pezh o deus graet va zadoù. Ar fazi 'zo ganit, paotr. Lenna rez da levr. azezet ez kador-vrec'h. An istor a zo c'hoarvezet gwechall, met da sellad a zo sellad hiziv. Breizh ha Keltia a welez ez levr n'eus bet anezho biskoazh. Den ne c'hell kaout faltazi a-walc'h evit ijinañ penaos e oa ar vuhez gwechall. Traoù 'zo ne c'hellomp ket gouzout penaos emaint, nemet o vevañ anezho, ha c'hoazh. Kit da Afrika, pe da Indez. Bevañ a rit gant an dud, met daoust ha bez e c'hellit kompren anezho? Nann! ur bed all eo. Tud 'zo a ren o buhez o studiañ ur bobl bihan kollet e penn pellañ ar bed. Dont a reont e fin o buhez da ziskouez petra o deus gwelet. Met petra e ziskouezhont deomp? Nemet ur bobl gwelet gant sellad un europad. Seul wech ma welint un dra, seul wech e raint ur c'heñveriadur etre

doare ar bobl all hag o doare-int.

Nann! Breizh ha Keltia gwechall a zo broioù estren ha den ebet ne c'hell lavarout penaos e oa ar vuhez neuze. Ur c'heal hon eus graet eus hor bro. Ur c'heal ha n'eo ket ar gwirvoud. Ur relijion vihan. Met warc'hoazh ivez a c'hell bezañ ur relijion. Stourm a reomp evit warc'hoazh, evit hor bugale. Warc'hoazh lavat n'eus ket anezhañ. N'eus nemet un dra a zo gwirvoud : hiziv, peogwir hiziv eo e vevomp.

Atav warc'hoazh. Ar Varksourion ivez o deus graet ur relijion eus "warc'hoazh". Ret eo mervel hiziv evitma vefe dieub ar bobl warc'hoazh. Ar mennoz-se 'zo iskis a-walc'h evit ar varksourion pa c'houlennont mervel evit bevañ. Relijion!

Neuze, petra eo Breizh? Peseurt ster en deus "bezañ breizhad" N'eomaomp ket e bro Descartes evit klask un abeg da bep tra. Peseurt ster en deus "bezañ Breizhad" ar goulenn-se a gas d'ar goulema: peseurt ster he deus

ar vuhez? Opalapa! Setu me deuet da vezañ ur prederour meur. Piv n'en deus ket graet ar goulema-se diwar-benn ster ar vuhez! Ha piv en deus gallet respont dezhañ. Ur wech c'hoazh va respont vo berr : n'ouzon ket.

E nann, tud! N'ouzon ket. Perak e vevan ? N'ouzon ket. Perak Breizh? N'ouzon ket. Perak Doue en deus krouet ar bed hag an denelezh? Kit da glask ur respont digantañ.

Ma kredomp^e Doue, ez eo ret mont dreist da bep danvez, em eus dija lavaret. Ret eo en em aozañ evit ar veaj veur a gaso ac'hanomp pelloc'h eget hor bro c'horf, e bro ar gwernved. Neuze, en em c'houlennan, petra a reomp amañ? Petra a reomp en ur c'horf mas eo pal ar vuhez dilezel ar c'horf? Petra a reomp war an douar

maz eo ret deomp deskiñ mont kuit diouzh ar blanedenn-
mañ? Perak e vevomp en ur bed danvezel, maz eo ret
deomp mont dreist d'an danvez evit kavout Doue. Ha pa
welan ar bed, gant ar brezel, ar vugale o varvel, an
direizhded, en em-dhouleunan peseurt ster he deus ar
vuhez, perak en deus Doue krouet traoù ken brein-
se. En em c'houleunn a ral: DAoust HA BEZ EO Doue UR
MICHEROUR FALL ? Setu ar goulenn, ha gouzout a ran, tu
vo da skrivañ meur a levr diwar benn an dra-se, ha
prezegenniñ e-pad meur a gantved, den ebet ne c'hell
kavout ar respont. Gwelloc'h eo c'hoazh gortoz ar marv
evit mont da glask ar respont digant an-Hini-en-neñv-en-deus
krouet-pep-tra. Da c'hortoz, ret eo bevañ, peogwir omp
rediet da vevañ. Tud-a-feiz ne c'hellont ket en em
lazhañ peogwir n'eus ket a varv evito. En em lazhañ a
zo mont en ul lec'h all. El lec'h-mañ n'eo ket kavet Doue
c'hoazh, rak n'omp ket glan a-walc'h. Arvet eo al lec'h
se : purgator. Ha diwar pezh an eus klevet ne
seblant ket al lec'h-mañ fentusoc'h eget an douar.
Gortozomp neuze, bevomp 'vel Breizhiz rak ret mat eo
bezañ un dra bennak da c'hortoz. Met na
zisonjomp ket e tremeno Breizh hag ar brezhoneg, ha
n'emaomp amañ nemet evit ur berramzer. (evurusamant).

Ha Stirner! N'em eus ket lavaret gwall dra
diwar-benn e skridoù. Ar gwellañ eo e lennec'h e skridoù
ha perak ket, e trofec'h anezho e brezhoneg.

Goude ar bibl, an divibl!

Yec'han-Dominig OLIER

- (1) : STIRNER : De l'éducation - en lisant l'unique.
enbanner : Spartacus. 11 lur gall.
STIRNER : L'unique et sa propriété.
enbanner : Stock. 25 lur atav gall.

I L I Z H A P O L I T I K E R E Z H E B R E I Z H

Emañ an Iliz e Breizh oc'h emdreiñ buan tre ha mui-ouzh-mui a veleion yaouank o sevel a-du gant ar sokialouriezh ena-eeun.

Ur skouer eus kement-se hon eus e degouezh ar beleg micherour a zo bet diskarzhet eus un embregerezh en Oriant, hini Le Beon. Graet o deus ar c'hazetennoù eus mestr an embregerezh-mañ ur "self made man", deuet eus ar bobl hag o klask paeañ mat e vicherourion, ur mestr kevredgar ha kristen, en ur ger. Evit ar beleg, ezel e oa eus ar c'hweluniad C.G.T. hag arnodet en deus sevel ur greizenn eus ar c'hweluniad-se en embregerezh, bepred hervez ar c'hazetennoù. Setu an traoù. A-raok dezvarn an degouezh-mañ, avat, e klaskimp termeniñ saviad an Iliz e Breizh evel er broioù krec'h.

Ret eo lavarout n'eo ket gwall sklaer ar saviad-se evit ar poent. Dre vras avat e c'heller lavarout emañ ar frammoù kozh an Iliz o vont da get er mare-mañ ; ar re-mañ a zistpad c'hoazh er parrezioù war ar maez, lakaomp, hogen gwirheñvel eo ne vo mui kavet a amsaverion dezho hag ar veleion **gozh**, kennebeut, n'en em adkavont en danvez beleion a hiziv ha na vezont mui stummet tamm ebet evel m'int bet o unan. Ar c'homm-mañ n'eo ket souezhus, goude holl : o steuziañ emañ ar gevredigezh plouezet henvoazel a oa pennañ skor an Iliz hengounel a ziagent. Arvestiñ a reer hiziv eta ouzh un argerzh distrujañ a gas da get tamm ha tamm an Iliz-se hep ma vefe anat evit se ar gweredoù anezhañ rak c'hoarvezout a ra gant an Iliz ar pezh a c'hoarvez gant ar gevredigezh henvoazel vrezhonek e Kornog ar vro : keit ha ma pado ar rumadoù kozh hag etre e hañvalo niver ar yezherion - pe hini izili an Iliz - chom stabil, pe goazhañ a nabeudoù ha gorrek tre. A-benn ugent pe dregont vloaz avat e kouezho ar brezhonegva en e boull koulz hag an Iliz hengounel ha frammet, e-giz pennadoù moger ez eo aet ar sol a zindano.

Distroomp bremañ da zegouezh ar beleg micherour en Oriant. Betek hiziv n'o doa ket ar veleion vicherourion degaset kalz ar gaoz warno e Breizh (kement hag em eus soñj, ar re gentañ anezho e Bro-C'hall a oa sellet un tammig evel romantelourion gant ar foran). Moarvat ivez nod eo ar veleion vicherourion nemet ur bihanniver dister kenañ e Breizh ; en darn vuiañ eus ar veleion dre vras a chom stag ouzh ar parrezioù hag a seven o c'hefridi hervez ar reizh hengounel. En em c'houlenn a c'heller eta peseurt mennad a zo gant ar veleion a ziviz en em enbarzhañ e metou ar vicherourion.

Meneget em eus degouezh ar veleion vicherourion gentañ aet d'al labourer bloavezhioù pemont e Bro-C'hall ; harzet e oa bet an arnod-se gant mererezh an Iliz un dek vloaz bennak

war-lerc'h ma oa bet boulc'het. Doujañ a rae pennadurezhioù an Iliz na c'hallje ar veleion-se seveniñ ur gefridi a veleg gant ar vicher o doa kemeret hag ar vuhez a rankent ren a-hend-all ; un toullad eus ar re o doa heuliet an hent-se o doa kuitaet an urzhioù a-hend-all.

Padal e oa aes kompren mennad ar re o doa sammet an intrudu-se en Iliz Vro-C'hall ; fellout a rae dezho adskoulmañ darempred gant ur renkad a oa bet digristenet abaoe deroù ar reverzhi c'hreantel, renkad micherourion an ijinerezh. Ur mennad a 'abostolerezh' e oa o hini hepken. Dre chom a-stok ouzh al labourerion e c'hoanaged lemel an disfiziañs a vage renkad ar vicherourion ouzh ar Feiz hag an Iliz (a-hend-all e oa digalon saviad ar beleg digenvezet war ar-maez, distag diouzh ar yaouankiz ha barmet da blediñ gant un tropellad fideled dic'hred ha diawen, aet war an oad an darn-vuiañ anezho).

Gwirheñvel eo avat ez eus bet ouzhpennet d'ar mennad kentañ a abostolerezh sellboentoù estren outañ. Diwar vevañ gant ar vicherourion ha kemer perzh en o buhez hag o obererezh politikel - didec'hus e oa ma ne felle ket dezho bezañ distaolet gant ar renkad a felle dezho gounit d'ar Feiz - ez eo deuet ar veleion vicherourion da zegemer tamm ha tamm, hep gouzout dezho moarvat, kealiadurezh ar strolladoù kleizour a reole an obererezh politikel-se endeeun. E-touez re all o deus darbennet an dezenn difennet gant ar varksourion dre vras o tiogeliñ penaos en deus renkad ar vicherourion ambilhet gant anaoadurioù komunour ur pennroll da c'hoari en dedroadur istorel a zle disoc'hañ d'ar sokialouriezh sellet evel un uhelvennad hetus. Kement-se, n'eus forzh penaos, ne c'helle nemet startaat ar veleion vicherourion en o youl da c'hounit d'ar Feiz an danvez renkad ren a warc'hoazh. Setu, da vihanañ, an diskleriadur a c'heller reiñ da "varksekadur" ar veleion vicherourion.

N'emaomp ket e soñj en niverenn-mañ dezrannañ ha burutellañ dezoioù kuzh ar veleion o deus divizet mont da renkad ar vicherourion, nag hini o usurzhidi ; se a raimp marteze, ur wech bennak e ser saviad an Iliz e Breizh. A-walc'h e vo deomp, en dro-mañ, ober un nebeut evezhiadennoù e ser darvoud an Oriant :

1) n'eo ket aet pennadurezhioù an Iliz - en dro-mañ, eskob Gwened - tamm ebet war skoazell ar vistri a oa kristenion, a-hervez, ha kevredgar, hervez ar brud ivez ; torret eo eta ar gevrat a stage an Iliz ouzh ar "bonez" gwechall, ha nevezik zo c'hoazh, ouzh ur c'hendere armerzhelour a oa kristen evit darn (hogen n'eo ket mui kalz hiziv kennebeut rak ne gaver ket ennañ muioc'h a zanvez beleion eget er c'hendereoù all, lakaomp) ;

2) padal, darvoud an Oriant bepred a ziskouez ivez emañ ar boblañs ordinal war-lerc'h frammoù an Iliz rak n'eo

ket bet harpet a yoc'h ar beleg micherour gant e genvicherourion. Meur a ziskleriadur a c'heller reiñ, eveljust, da zilezidigezh ar beleg c'hweluniadour gant labourerion an embregerezh-se ; unan anezho a zo, eveljust, an diouer a stummadur hag a enframmadur politikel en o zouez ; hogen soñjal a c'heller ivez e teu kalz a vicherourion hag a vicherourezed diwar ar maez ha boaz int moarvat da sellout ouzh ar beleg evel ma raed gwechall war ar maez ivez ; ur meizadur hengounel o deus miret eus roll ar beleg er gevredigezh.

3) Un trede evezhiadenn, diforc'h diouzh an div gentañ. War a hañval n'eo ket ken krenn an eneberezh etre mistri ha gopridi en un embregerezh pa vez gwrizioù d'ar vistri er c'horn-bro (kv. ivez degouezh Koadlinez). O studiañ istor ar c'henstokoù kevredigezhel e Breizh er bloavezhioù diwezhañ e vefe merzet ez eo bet taeraet ha krennaet da vat ar re a dage dreist-holl renerezhioù dizanv hag estren (kv. Le Joint Français ha Pederneq). Afer an embregerezh Laïta a vefe da studiañ ivez er c'heñver-se.

Gwirekadurioù n'eus ken eus an evezhiadennoù-mañ, anat eo. N e c'hellfemp barn nemet dicuzh ur savboent politikel kevredigezhel bennak. Se a raimp ur wech bennak. En un niv-erenn all hor bo tro da gomz adarre eus ar stourm sokialour hag etrerenkadel e Breizh, eus roll an Iliz pe ilizourion zo er stourm-se, diouzh ur savboent politikel ha kravezel, dres, en dro-mañ.

=====

D i s k e l a d e g o ù a n h a ñ v e B r e i z h

Dalc'het eo bet kamp bras an hañv e dibenn miz Gouere hag e deroù miz Eost en hañv-mañ. Kalz tud a zo tremenet dre Bont-e-Kroaz, muioc'h, moarvat, eget e nep kamp-hañv all betek henn. Gwir eo e oa bet kediet er c'hamp-se devezhioù-studi S.A.E. gant K.E.A.V. hag en arbenn a se, emichañs, ez eo bet uheloc'h eget boaz niver ar berzhidi. Ret eo lavarout, koulskoude, e oa kustumet kalzig eus izili S.A.E. da dremen ivez un nebeut devezhioù e K.E.A.V. Evelkent e c'heller goulakaat ez a war greskiñ bep bloaz bagad an nevez vrezhonerion peogwir e kejont stankoc'h-stankañ er c'hampoù-hañv.

Ratozh kentañ ar re a felle dezho aozañ ur c'hamp bras e-lec'h ar c'hampoù distag a veze dalc'het betek hiziv a oa urzhiañ un doare Skol-Veur hañv evel ma vez graet e broioù bihan zo. Hogen en em c'houlenn a c'heller ha lec'h a zo e Breizh, hiziv, d'ur seurt ensavadur ; a-raok krouiñ ur skol-veur - ha pa ve ur skol-veur hañv - e ranker kaout arbennigourion war o yezh hag un danvez bennak, ha studierion ken barrek all war ar yezh ivez hag ur poent bennak. D'an eil, ne vez ket savet ur skol-veur hañv zoken war ar prim. Ret eo d'ar re a gemer ar samm anezho o frientiñ a-hed

ar bloaz ; ar stourmerion war ar yezh a zo ken distank c'hoazh ma n'eus ket tu da gavout en o zouez kefridiaded a vefe karget da zañzen dalc'hoù-studi ur skol-veur hañv. Ouzhpennañ a raimp e rankfe ar skol-veur hañv-se kreizennañ he studioù war ar poentoù a denn war-eeun da stourm an Emsav anez kouezhañ en dilettantiezh ; ne welan ket peseurt mad a c'hell tennañ an emsaverion diwar selaou prezegennoù gouiziek diwar-benn Hititiz pe an dotemouriezh en Aostralia.

Er pleustr, a-hend-all, n'eo ket bet disheñvel bras kamp Pont-e-Kroaz diouzh kampoù all K.E.A.V., da lavarout eo ez eus bet anezhañ - nemet evit an deskarded o devoa poan a-walc'h o teskiñ komz - ur c'hamp ehanañ hag en em ziduiñ dreist-holl. Moarvat, darn a zo bet kalonek a-walc'h evit mont war ar maez pe er bourc'hioù tro-dro evit dastum devotamant brezhoneg ar c'horn-bro war o sonenrollerioù. An darn-vuiañ anezho a zo aet d'an aod hep mezh ebet ; eno, marteze, n'o deus ket 'tipotet' hervez an hengoun keavat, hogenc'hoariet o deus vole-bol, ar pezh a zo a-boan enorusoc'h.

Evelkent ez eus bet graet un nebeut kentelioù war zanvezioù arbennik hag a hend-all ivez ez eus bet distaget un nebeut prezegennoù dedennus tre a-wechoù ha gant areizhourion o tont a bep tu eus an Emsav ; er c'heñver-se, sur mat, en deus graet berzh-mat ar c'hamp.

En abeg sa se, dres, e oa mat Pont-e-Kroaz, dre ma roe tro da emsaverion o stourm e-barzh aozadurioù liesseurt da gejout ur wech ar bloaz, da vihanañ. Padal, evit ma vefe frouezhus da vat ur seurt kamp, zoken ma rank menel war ur bazenn izel pe etre, e tlefe bezañ prientet gant aked a-hed mizvezhioù, gant stourmerion ha na rafent nemet se. Marteze ne vefe ket dav e vefe ken niverus ar berzhidi na ken digevatal o derez deskadurezh vrezhonek. Gwell e vefe moarvat e keufe hepken ar re a gemer perzh da vat e labour an Emsav hag a zo barrek a-walc'h war ar yezh evit gellout breutaat hag eskemm mennozioù gant frouezh kenetrezo. D'ar c'houlz-se e tlefe ar c'hamp-se bezañ prientet dindan atebegzh ur c'hengor a vefe amparet gant dileuridi oas aozadurioù liesseurt an Emsav, gant na vefent ket re enebet e-keñver politikerezh evelkent rak, neuze, ne servijfe da netra. Un aozadur evel S.A.E a c'hellfe kemer intrudu ar c'hamp-se, lakaomp.

E ser S.A.E. e sav ur gudenn a-hend-all rak akourset e oa an aozadur-mañ da zerc'hel daou gamp distag e-pad an hañv. Ma sammfe aozidigezh danvezel goursez an Emsav e vefe dav dezhi dilezel unan eus ar c'hampoù-se.

K.E.A.V., d'am soñj, a zlefe chom ar pezh ez eo bet a-viskoazh : ur c'hamp digor evit an deskarded hag an emsaverion o deus ezhomm kejout ha kemer ehanou a-gevret.

Ret mat eo anzav : abaoe m'eo dizeriet S.A.D.E.D. n'eus bet krouet aozadur ebet gouest d'e amsaviñ. Kampoù S.A.E. a zo manet e rez ar c'hentañ pe an eil bloavezh,

hiniennoù zo e-touez ar gelennerion, hepken, o devoa un anaoudegezh don a-walc'h eus ar yezh. An dra-se a zo bet anat, adarre, e devezhiou-studi deroù Gwengolo e Leon. Ret eo lavarout ne vrouder ket an danvez emsaverion da beurzeskiñ ar brezhoneg evel yezh a sevenadur ouzh o lakaat da gemer preder gant gant trefoedajoù lec'hel, e-giz pa vije dav gouzout dindan eñvor an "Atlas linguistique de Basse-Bretagne" eus Pierre Le Roux evit gellout ober gant ar yezh. Unan a zaou : pe en em stalio an danvez emsaverion-se war ar maez e "Breizh-Izel" ha dre ret e rannkint deskiñ ar rannyezh-mañ-rannyezh m'en em gavont en ur c'horn maz eo bev c'hoazh ar brezhoneg ; pe e chomint e kêr, e darempred gant emsaverion all dreist-holl, ha d'ar c'houlz-se ez eo koulz dezho degemer diouzhtu ar yezh unvan.

Ouzhpennomp ez eus bet kampoù all e-pad an hañv. Unan anezho a oa aozet gant "Ar brezhoneg er gêr" evit ar vugale e Kombrid (bez ez eo "Ar brezhoneg er gêr" un danvez kevredad a gemer da gefridi harpañ ar gerent a sav o bugale e brezhoneg.) A-hend-all e oa bet postet un nebeut deskarded war ar yezh war ar maez e Treger gant S.A.E. e deroù miz Gouere. Oc'h ober se ne rae S.A.E. nemet dispenn roudoù "Al Leur nevez" ; un dra vat eo moarvat d'an deskarded en em voazañ da intent un eilyezh bennak hag en em c'hourdoniñ da implijout troiennoù ar yezh henvoazel hogen arabat eo krediñ ez eo gant ar werin a hiziv e peurzsko unan ar yezh hiziv ; ne "daper" ket ur yezh ; ne "daper" nemet ur "parland" bennak ; hag estreget ur "parland" ez eus ezhomm er bed gouezoniell ha kalvezoniell a hiziv.

A r C'h e n d a l c'h e t r e k e l t i e k
e n N a o n e d

Un diskeladeg henvoazel eo hini ar "C'hendalc'h etrekeltiek" : padout a ra abaoe deroù ar c'hantved (dindan aked ar "Gorsedd" da gentañ) hag en un doare reoliek abaoe fin ar brezel diwezhañ (hogen en naontekvet kantved e oa bet endev div vodadeg a seurt se : lennit "Istor an Emsav" war an divoud-se). Me va unan em boa kemeret perzh en hini 1947 e Dulem. Abaoe, avat, n'em boa ket bet tro da vont da hini ebet, nemet Landreger e 1962.

En Naoned end-eeun ez eus bet renet diskeladegoù a seurt se diagent er c'hantved-mañ : unan e 1911 dindan atebegezh ar "Gorsedd" (kv. adarre "Istor an Emsav") hag unan all da zerc'hent an eil brezel bed.

Moarvat ez eo bet ur soñj mat aozañ an diskeladeg-mañ en Naoned a zo bet nac'het enklozañ er "rannbarzh-steuñviñ Breizh" gant ar mererezh gall, a-benn embann, dres, brezhonelezh "kêrbenn an Duged", daoust ma ne gemm ket dasparzhadur nevez an diriegezh c'hall kalz a dra e saviad

politikel gwirion ar vro. A-hend-all, rouez tre eo ar bodadegoù etrekeltiek hag un dra vat eo eta derc'hel d'un ensavadur evel hini ar C'hendalc'h, pa n'eus hini all ebet, nemet ar "C'hevre keltiek" abaoe un nebeut bloavezhioù. Kalz dellid en deus bet P.D. eta koulz hag ar re o deus e harpet o kempenn an traoù e sell d'ar gouel-mañ. Ur c'hur eo bet moarvat bodañ kemendall a Gelted a-gevret e-pad ur sizhunvezh a-bezh en Naoned.

Evel diskeladeg politikel - broadel, pa ne ve ken -, avat, ez eo ret anzav e chom ar C'hendalc'h amsteriek a-walc'h. Da skouer, daoust maz eo atebieion ar c'hevredad-mañ a-du gant frankiz ar broioù keltiek e rankont reiñ un neuz kefridiel d'o bodadeg (gwir eo ne oa netra da feukiñ diskouarn ar vrogarourion gelt er prezegennoù a voe distaget en ti-kêr an Naoned). Ret eo lavarout a-hend-all ez eo ar C'hendalc'h ur vodadenn dieub ha digor d'an holl, e-lec'h, avat, ne labour nemet un nebeut tud evel e nouspet stroll breizhat ; n'eo ket ar C'hendalc'h un aozadur e nep doare ; dre se, kennebeut, n'eo ket un nerzh politikel. Ar re a gemer perzh ennañ ne leuriadont nemeto o unan. Darn eus ar re a zeu d'ar bodadegoù aozet gantañ ne vezont lusket nemet gant ar c'hoant bale bro (evel Breizhiz a ya d'an Eisteddfod) ha se a oa gwir, emichañs, a-zivout Kembreiz a oa deredet d'an Naoned a garradoù leun chouk ; moarvat ez eo Kembreiz muioc'h emouez ouzh an etrekeltiegezh eget nep broad keltiek all hogen aozadur politikel na sevenadurel ebet n'en doa dileuriet un derc'houezer bennak, goude ma ne vije bet nemet un 'arvester' led-kefridiel, nag e Kembre nag er broioù all.

Ne rin ket anv eus an abadennoù sevenadurel. An hini nemeti am eus kavet dudius da vat ha fromus a voe "Cymanfa Canu" Kembreiz en Iliz Sant Nikolaz ; en e geñver e hañvale chañsonioù folklerek ar ganerion vreizhat bezañ treutik ha dister ; hogen andra-se a zo un afer all.

Eus talvoudegezh politikel ar C'hendalc'h e felle din komz avat. Evel m'em eus merket e deroù ar rannbennad-mañ, n'eo ket bet anat an dalvoudegezh-se. Da se eo bet kiriek moarvat dizingalded ha digenseurtted an dileuriadegoù a oa en em gavet en Naoned. Hengounelour a-walc'h - evit chom hep lavarout 'giz kozh' - e oa ar re a oa deuet eus Iwerzhon, Alba pe Gernev-veur. Dre vras, a-hend-all, e c'heller lavarout ne oa ket ar Gelted tramor chalet bras gant ar mennoziou kleizelour ma oa awenet ganto, mui pe vui, an danvez emsaverion yaouank a oa deuet d'an Naoned (evel m'eo kaer gortoz hag hervez saveleñoù an impalaouriezh ez eo ar pobloù suj renet gant an darvoudoù a c'hoarvez er vroad vestronierezh - en degouezh-mañ brizh dispac'h parizian 1968 - eget gant an darvoudoù... ha na c'hoarvezont ket en o broad o unan).

D'ar gwener, a-hend-all, en doa klasket Gi Karo a gemere perzh en emvod lakaat mouezhiañ ur mennad disfiz-iout ha tamall ouzh gouarnamant Dulenn dreist-holl, o tamall da hemañ harpañ an impalaouriezh ; gouzout a reer e oa bet berzet ouzh Gi Karo douarañ e Dulenn gant al levieriezh iwerzhonat (1), (evel ma oa bet difennet ouzh daou ezel eus an U.D.B., Doue a oar perak, tapout douar e Bro-Saoz en hañv-mañ ivez). Eveljust e oa bet distaolet ar mennad-se gant ar Gelted all pe a oa hengounelourion anezho pe a oa deuet d'ober touristerezh nemetken. Dre vras eta e oa ar Vrezhoned a oa deuet d'ar C'hendalc'h muioc'h politikelaet eget ar Gelted all daoust ma ne oant ket, peurvuiañ, izili eus ur strollad politikel bennak hogen ret eo degemer ivez e oa ganto mennoziou disklaer ha kourmoulek a-walc'h diwar-benn doare ar stourm a zo da ren e Breizh, zoken war dachenn ar yezh (re alies en em ziskoueze en o c'homzoù ar vrizh werinelouriezh hon eus diskuliet alies er gelaouenn-mañ.)

E gwirionez ne oa ket ar C'hendalc'h ul lec'h d'ober politikerezh : pe n'o doa ar berzhidi mennoz politikel ebet pe, neuze, o devoa mennoziou enebet krenn kenetrezo, zoken e diabarzh an dileuriadegoù ; e-touez Breizhiz, da skouer, ne oa unvaniezh na, zoken, darempred ebet etre ar rummad yaouank hag ar rummad kozh eus an eil Emsav, reoù eus ar rummad-se, a-hend-all, o vezañ tremenet ar pep brasañ eus o buhez en harlu ha disrannet a-grenn diouzh lusk ar stourm kempred e Breizh. D'ar c'houlz-se e c'heller en em c'houlenn ha talvezout a ra ar boan kas trouz en ur vodadeg dastumet dre zegouezh e-lec'h n'eus da gavout perzhiad ebet dileuriet gant un aozadur bennak.

Moarvat e c'hellfe ar "C'hevre keltiek" pourchas ur benveg efedusoc'h da stourm ar broadoù keltiek dre ma ren un obererezh a bad a-hed ar bloaz hag en em ziskouez, peurgent, en embannidigezh ur gelaouenn hag e dalc'hidigezh emvodoù labour reoliek. Padal, dre vras, e chom bevennet strizh an obererezh-se ha ned a ket kalz en tu-hont d'ar stourm broadel-yezhel, pe vruderezh hollek, moarvat dre maz eo liesseurt dibaboù politikel an izili a labour ennañ hag ez int enouestlet e-barzh aozadurioù liesdoare a-hend-all ivez.

Anat eo o deus ar C'hendalc'h hag ar C'hevre ur roll da c'hoari hag e ve diboell goulenn diganto sammañ ur roll ha na zere ket outo. Hogen, ivez, kavout a ra deomp ez eus ezhomm strolloù all liesseurt evit stourm en un doare efedus a-enep d'an impalaouriezh a zo o waskañ ar broadoù keltiek.

(1) Pezh a zo heverk en afer-mañ ez eo emell ur c'hargiad eus an Aferioù diavaez gall a zo aet da hanterour evit evit lakaat levieriezh Dulenn da zistreiñ diwar e soñj, hep ober berzh avat. Se a ziskouez e sell ar mererezh gall - kv. degouezh Régis Debray - ouzh kleizourion pe gleizelourion zo, evel dileuridi an "Intelligentsia" c'hall dirak an Trede Bed.

Pouez an impalaouriezh, dres, a oa anat er C'hendalc'h etrekeltiek, dreist-holl en disparti a oa lakaet etre ar Gelted en abeg d'ar yezh. Dre maz int stag ouzh riezoù estren e stumm pe stumm e chom pep pobl geltiek bac'het, koulz lavaret, er yezh hag er sevenadur a zo bet lakaet warni a zivar ar stagidigezh ouzh Bro-Saoz pe Vro-C'hall. Mil poan o doa Brezhoned ha Gelted all da eskemm mennoziou ha re bounner e oa ar reizhiad treiñ a oa arveret en Naoned evit reiñ tu d' ar berzhidi da gemer perzh da vat er Breudoù, zoken er c'hengorioù a oa bet karget da skridaozañ an danvez mennadoù a zlee bezañ mouezhiet e diwezh ar c'hendalc'h: an hanter eus an amzer a oa gouestlet d'ar c'hevyezherezh. Disheñvel e vefe an traoù m'o defe tro ar Gelted da beurzeskiñ ur yezh keltiek all estreget o hini hag ur yezh kehentañ etrevroadel estreget hini ar riez ez int stag outañ. Unan eus azonoù an impalaouriezh avat eo serriñ ar pobloù suj en amgant sevenadurel (hag armerzhel, na petra) ar stadoù mac'hom.

Enebiñ dre gomz hepken ne servij ket kalz (1) ; enebañ dre ar feulster ne servij ket kalz muioc'h peurvuiañ. N'eus ket da zistrujañ karc'har an impalaouriezh, - da zont er-maez anezhañ, da gentañ, ne lavaran ket (pa c'heller, eveljust, hogen e dibenn an ugentved kantved ez eo aesoc'h eget en deroù.) Ar pezh o deus an emsavioù keltiek da ober ez eo steuiñ liammoù fetis etre ar broadoù keltiek war gement tachenn zo, oc'h ober gant yezhoù broadel. Sevel a ranker kevredadoù etrekeltiek arbennik o plediñ gant kevrennoù resis eus buhez hor broadoù. An dra-se n'eo ket bet gallus betek henn dre ma n'eo ket diorreet a-walc'h hon emsavioù ken ez eo rediet ar stourmerion anezho da ober war-dro an emgann yezhel broadel hepken. Dre ma kresko niver an emsaverion avat e c'hello darn anezho en em reiñ d'an darempredoù etrekeltiek a aozadur da aozadur pe a skourr da skourr eus an obererezh sevenadurel pe bolitikel keltiek. E-kerzh ar bloavezhioù diwezhañ ez eus bet graet arnodoù war an tu-se evel hini ar skrivagnerion geltiek e Kêrdiz e 1969 (n'eo ket bet nevezet, siwazh), hini kejadenn dileuridi eus "Plaid Cymru" hag U.D.B. a zo troet da fall a-hend-all hogen a c'hellfe c'hoarvezout etre aozadurioù keltiek all. Empennañ a c'heller e kejfe en un doare reoliek arzourion, politikerion, kelennerion, skrivagnerion, c'hweluniadourion, beleion ha tud a gravez eus ar broioù keltiek evit eskemm titouroù hag en em genskoazellañ, diouzh ret. Moarvat e vo start tremen dreist da voger ar yezh hogen

(1) Ar pezh a c'heller tamall da emell Gi Karo eo ne blede ket war-eeun gant stourm dibar ar broadoù keltiek. Implijout a rae hepken ar C'hendalc'h evel kef-dasseniñ (diefedus a-walc'h, a-hend-all) a-benn brudañ ur stourm enep-impalaour o chom e par ur protesterezh peurbadus ha difetis. Petra a c'hell goulenn ar stolloù a chom digenurzh ha dic'houest da grouiñ netra ?

hogen houmañ, koulskoude, a zo ar c'hentañ skcilh da lemel.

A-viskoazh hon eus pouezet war retvezh ur stourm renet a-gevret gant ar broadoù keltiek ha diskouezet hon eus e-barzh 'ISTOR AN EMSAV' pebezh perzh o deus bet an darempredoù etrekeltiek en azginivelezh hor pobloù. Moarvat e hañval an darempredoù etrekeltiek, gant maz eo aes beajiñ, bezañ stankoc'h eget gwechall ; muioc'h a Vrezhoned, muioc'h a emsaverion a ya da vevañ e-pad bloaz pe zaou e Kembre, pe da weladenniñ ar broioù keltiek eget n'eus bet biskoazh; diskeladegoù ar "C'hendalc'h keltiek", lakaomp, n'int ket paouezet biskoazh abaoe daouzek vloaz zo ; krouet eo bet ivez ar "C'hevrek keltiek" ; ur gelaouenn etrekeltiek a vez embannet. Arabat e vefe avat d'ar stourmerion krediñ ez eo kement-se un amkadenn vras hag ez eo an trec'h prest da zont gañomp. Nebeut tre a dra eo c'hoazh an darempredoù etrekeltiek ; ne ranker ket disoñjal a-hend-all, da skouer, ez eus bet embannet dija kelaouennoù etrekeltiek, a-raok ar brezel bed kentañ ha war-lerc'h an eil ("An amzer geltiek"). Erfin maz eus muioc'h a Vrezhoned o veajiñ pe o chom e Kembre, nebeut tre anezho a oar mat yezh ar vro-se, a heuilh buhez kefredel ha sevenadurel Kembreiz pe a gemer perzh enni.

Kalz a chom da ober war dachenn an darempredoù etrekeltiek ; d'ar re o deus meizet pebezh pouez o deus an darempredoù-se e stourm kevan ar broioù keltiek labourat a-gevret ha gant reizh, hep arsav ebet, evit maz afe war-raok hep fallaenn kenwered hor broadoù.

=====

PROFOU EVIT "IMBOURC'H"

Klask a reer neveziñ ha diorren ar gelaouenn "IMBOURC'H" er mare-mañ. Argwellañ tu e vefe klask koumanatierion nevez dezhi ha kas pennadoù ha keleier. Anaoudek e vefemp ivez o te-gemer profoù eviti. Ar re-mañ a c'hell bezañ kaset d'ar G.R.-mañ: Y. Ollivier 2 656 30 A Roazhon. Ho trugarekaat a reomp en a-raok.

=====

EMBANNADURIOU NEVEZ

Er miz a zeu e teuy er-maez levrenn gentañ "ISTOR HOL LENNEGEZH" a zo gouestlet da SKOL WALARN, ha peurgent da oberenn ar skrivagner Roparz Hemon. Embannet e vo evel ur stagadenn da niverenn miz Here. Ar priz anezhi a zo 20 lur, gant ar mizoù-kas.K.R. 1 534 25 Roazhon. Y. Ollivier.

An eil levrenn eus an oberenn-mañ a zeuio er-maez e dibenn ar bloaz.

E deroù ar bloaz a zeu, emichañs, e vo embannet ul levr politikouriezh gant Jil Ewan. Keloù amploc'h a roimp d'hol lennerion a-c'houdevezh.

H O L L E N N E R I E N A S K R I V :

A-zivout ar pennad "An Emsav hag ar sponterezh" en niverenn 47 :

"... Ne gomzit ket en ho pennad eus harzoù-labour ar vicherourien e Bro-Naoned, dreist-holl eus re 1955 a voe ken taer.

Ha gouzout a rit ez eus bet krogadoù feuls-kenañ e miz gouere ha dreist-holl miz eost 1955 etre micherourien ar chanterioù hag ar C.R.S.ed (7 000 C.R.S. a oa bet degaset gant ar gouarnamant gall e Sant-Nazer !) D'al lun kentañ a viz eost e voe gloazet 60 micherour e Sant-Nazer, 11 anezho tizhet gant skolpennoù greunadenn ! Ret e voe troc'hañ gar ur micherour !

Adkregiñ a reas al labour d'an 3 a viz eost, goude m'en devoe kilet ar gouarnamant met kregiñ a reas an harzoù-labour neuze e kêr Naoned.

Krogadoù taer a voe gant an archerien d'ar merc'her 17 a vie eost 1955 e kreiz-kêr Naoned. Aloubet e voe burevioù ar batromelezh ha gwastet pep tra enno. Dalc'het e voe ar batroned prizonidi enno e-pad meur a eurvezh.

D'ar yaou 18 a viz eost e voe krogadoù nevez hag ouzhpenn 11 000 micherour a zibunas dre straedoù Naoned (micherourien ar vetalouriezh hag ar saverezh-tiezh). E-kichen an iliz-veur e krogas ar vicherourien da zibavezañ ar straedoù evit stlepel ar pavezioù ouzh ar C.R.S.ed a vire outo da dremen. Taol-et e voe un doare bombezenn outo hag hi da c'hloazañ 17 C.R.S., 10 anezho ez sirius. Hag ar re-se da goll o fenn. ^B dibenn an devezh e konted kantadoù a c'hloazidi, 52 kaset d'an ospital, en o zouez 30 C.R.S. ha 22 vicherour.

Gwashoc'h e voe c'hoazh an traoù d'ar gwener 19 a viz eost diouzh an abardaez. Feuls-kenañ e voe neuze ar c'hrogadoù, gant 7 000 micherour kounnaret o tibunañ evit goulenn dieubidigezh an dud bac'het an derc'hent. Ur C.R.S. saouzanet a dennas gant e vindrailherezig ouzh ar vicherourien, o lazhañ ur micherour yaouank hag o c'hloazañ fall daou zen all. Ar paotr lazhet, Jean RIGOLLET, a oa ur mañsoner 24 bloaz, genidik eus Santez-Lomen-Kouteg (Sainte-Lumine-de-Coutais) e kreisteiz Naoned. Ur mor a dud a gemeras perzh e lidoù e zouaridigezh hag en tu all da Vreizh, e Brest, e tivizas 1200 micherour herzel al labour ivez evit diskouez o unaniezh gant micherourien Naoned. Adkregiñ a reas al labour e Bro-Naoned, goude ur vouezhiadeg, d'an 22 a viz eost..."

Notenn ar gelaouenn : trugarez d'hol lenner. Evit kompren mat ar perag eus an harzoù-labour-se e c'heller lenn ul levr gallek skrivet gant ur micherour daou vloaz'zo hag a zo talvoudus a-walc'h d'hor meno : Les Prolos gant Louis OURY (Seuil)

D I S K O U E Z A D E G O U
A N H A Ñ V

Tu zo bremañ da reiñ brezhoneg da glevout e meur a lec'h, bemdez hag e-pad ur mizvezh a-wechoù, a-drugarez da lurelloù gwarellek (1) a vez lezet da dreiñ er salioù diskouezadeg.

Setu pezh a zo bet kroget d'ober e Gwengamp da geñver un diskouezadeg aozet gant artizaned vreizhat etre ar 5 Gouere hag ar 5 Eost hevlene.

An destenn a vo gallet lenn amañ zo ur skouer eus pezh a zo tu da lavarout da dud ur rannvro galvet da weladenniñ seurt diskouezadegoù, gant ma vo aes ar brezhoneg, evel dres, ha kavet ivez un den da zistagañ ar yezh hervez doare ar sitread :

"Hon gwellañ gourc'hemenoù da gement hini a zo deuet betek amañ ! An Arvor eo an anv a vez roet d'ur vro bennak stok ouzh ar mor. An Arvor eo, neuze, hon bro dimp, gant he reier war an aod, troc'het-didroc'het, ken fin ha dantelezhioù ur vigoudenn.

"An Argoad eo an anv a vez roet da ziabarzh ar vro dre amañ, bro ar c'hoad, mar kerit, hag a vez o lugerniñ, pa grog an hañv, gant bleuñv liv acur al lann, evel ma vezent livet gwechall war brozhioù ar merc'hed ha war dilhad ar baotred.

"An Arvor koulz hag an Argoad a zo hon bro Vreizh en he fezh, gant he chapelioù, he c'halvarioù hag he zourioù kizellet ha labouret dispar. Traoù kaer meurbet, a dra sur, o tont dimp diwar dorn artizaned an amzer gozh, tud hag a gave nerzh da grouiñ abalamour d'o feiz, ur feiz ken start hag ar mein a labourent.

"A holl viskoazh he deus bet hon bro artizaned dornet mat, dornet eus ar c'hentañ. Gwechallgozh e teue marc'h-adourion eus pevar c'horn Europa da Gintin, da Wengamp ha da Lokronan da bremañ lien mat graet gant al lin hadet e Breizh. Savet e veze bagoù dre lien da vont war vor d'ober kenwerzh pe d'ober brezel gant martoloded Sant Maloù. Pinvidik oa hon bro d'ar c'houlz-se.

"An ardivinkoù, ar mekanikoù kroeg da vont en-dro ouzhpenn kant vloaz zo e kêrioù bras Frañs hag Europa a vez bremañ oc'h ober al labour a veze graet gwechall gant an dorn dre amañ. Ken ma rankas hon artizaned kuitaat Breizh evit mont e lec'h all da c'hounit o bara.

"Ar rod a dro avat... Ha bremañ e plij kalz muioc'h d'an dud a vez o klask traoù kaer da bremañ al labour graet gant dorn an artizaned. An traoù graet gant an uzinoù bras n'o deus na kaerder na stumm ebet. Graet e vezont gant mekanikoù n'o deus na feiz nag ene ebet.

"Erru omp tost bremañ d'ar bloaz 2000. Ha daoust d'an uzinoù bras e weler tud adarre o klask ober ha krouiñ gant o daouarn ha gant o c'halon evel gwechall o zadoù kozh. Deredek a ra an douristed da welout o stalioù hag an traoù kaer a stummont gant o daouarn ken ouesk ha ken donezonet.

Setu tost da dri-c'hant vloaz e voe savet ar chapel-mañ, lec'h ma c'hallomp estlammiñ dirak al labourioù a bep seurt a zo diskouezet dimp. An artizaned o deus degaset o zraoù amañ ne glaskont nemet un dra : lakaat da barañ dirak hon daoulagad al labour kaer a c'hallont ober c'hoazh, peogwir o deus adkavet troioù-micher spered feiz ha kalon ar re gozh, Bretoned dornet dispar evelto.

"Pezh a zo diskouezet amañ n'eo nemet un tañva. Evit gwelout an traoù evel m'emaint, e vefe gwelloc'h da bep hini mont dre ar vro, war ar maez, da gomz gant an artizaned. Ur blijadur vras e vo evit o daoulagad hag evit o spered."

o
o o

An destenn-mañ zo bet distaget e teodyezh Treger. Hervez ur sondadenn bet graet war al lec'h e Gwengamp m'edo an diskouezadeg e chapel an Ti-kêr, ez eo bet komprenet mat kenañ ar c'hozoù enrollet war al lurell warellek, da vihanañ gant kement hini a oar c'hoazh ar brezhoneg. Ur skouer enta da vezañ heuliet e lec'h all.

(1) "Gwarellek"="magnetek"

JIL EWAN

=====

L i z h i r i

D O A R E O U "EMGLEV AN TIEGEZHIOU"

Meneget eo bet E.A.T. en ur pennad talvoudus "Tri zalbenn ar stourm evit ar yezh" e niverenn 53-54 IMBOURC'H. Diskleriañ a ra ar pennad n'eus ket bet sevenet gwall dra en tu-hont da emgavadegoù ingal an nevez-amzer hag an diskar-amzer hag "un emvod bennak da geñver K.E.A.V."

Reizh eo resisaat ez eus bet kaset da benn hag e vez bepred sevenet oberoù all gant an "Emglev". Ar vuhez, al labour e pep tiegezh n'eo ket da vezañ lakaet war gont E.A.T. hogen aesaet eo bet gantañ, tamm pe damm, gant ar santimant ez eus tiegezhioù all o kas war-raok an hevelep labour.

Oberoù ' zo, avat, a zo bet kaset da benn gant E.A.T. :
- kenstrivadegoù tresadennoù a-hed 5 pe 6 vloaz, kantadoù a vugale o kemer perzh enno ;

- Pezhioù-c'hoari bet displeget gant bugale ha tud yaouank tri pe bevar bloaz lerc'h ouzh lerc'h gant kreizenn Roazhon ; lod anezho a zo bet embannet war ar gelaouenn SKOL abaoe.

- Un abadenn vargodennoù nevez zo.

- Skoazell da familhoù stourmerion ar F.L.B. bet bac'het ;

- skoazell da familhoù ULAD (timbroù "Breiz-Iwerzhon").

- Ur bladenn gontadennoù embannet gant kenlabour "Wanig ha Wenig" ;

- enklask hag eskemm gerioù pemdeziek etre an tiegezhioù.

- Eskemmoù bugale (nebeut avat).

- Darempredoù da badout skoulmet etre bugale hag ivez etre tud en oad.

- Kounlid war lanneg emgann Sant-Albin bep bloaz d'an 28 a viz Gouere ;

- emvodoù kreizenn (n'int ket aozet evit Breizh a-bezh avat).

- emvodoù pediñ en hor yezh.

- Kentelioù brezhoneg evit un toulladig bugale e lec'hioù

zo ;

- darempredoù spanaus pe badus gant miliadoù a diegezhioù o klask anvioù-badez evit o bugale.

Ouzhpenn-se, evel m'emañ skrivet e-barzh IMBOURC'H, ez eo bet (hag ez eo bepred) E.A.T. "ur burev embann kemennadennoù" evit ar Wask, ha gant se en deus bet hag en deus dalc'hmat ur roll kelaouiñ talvoudus. Kelaouennoù zo, aes da spontañ gant ar strolladoù politikel, a zo prestoc'h da zegemer skridoù digant un "emglev tiegezhel."

El lodenn-se eus buhez E.A.T. e c'heller merkañ ivez al lizhiri hag an diskleriadurioù a-du gant frankiz ar c'helenn, an doujañs da vab-den, dieubidigezh prizonidi ar F.L.B., an doujañs da vuhez an dud.

Gwir eo ivez ez eo bet bihan ha dister alies oberoù an Emglev. Evel reizh ez eo pell diouzh bezañ peurvut ha peurefedus ar re a ro lusk d'an Emglev. Abegoù all a zo ivez : al labourioù all sevenet gant izili E.A.T. er-maez eus ar gevredigezh., an diaes maz eo d'an dud kemer perzh a-zevri e buhez un emglev, ar c'hlouar maz eo deuet tud zo da vezañ e-keñver buhez ar Feiz, ar strewet maz eo an toulladig tiegezhioù brezhonek...

Ha koulskoude, kerkent ha maz eus tiegezhioù eus an Emglev er memes kêr e teu kalz aesoc'h ar vuhez hag al labour ; aesoc'h c'hoazh pa vez tud dizemez o reiñ sikour... Kement-se a zo c'hoarvezet e Roazhon etre 1961 ha 1965 : sulvezhioù baleadennoù ha c'hoarioù bep miz, sikour d'an oferenoù brezhonek, c'hoariadegoù (pezh a laka anat e oa bet meur a bleustradenn) ha kement-se a stroll hag en hor yezh.

Pemp bloaz warn-ugent goude bezañ bet savet, daoust d'an diaesterioù d'ar skoilhoù ha d'ar frouezh dibaot a-wel d'an holl, e talc'h E.A.T. da oberiañ war un dro evit klod Doue ha gwirioù Pobl Vreizh, o sammañ e lod er gevredigezh nevez.

Y o u e n n S O U F F E S
A l a n A L L O U A R N

=====
Lieskrivet gant ar gelaouenn CPPP 50 015 Ar rener : Y. Ollivier